

Orin an den

Goulenn diazez :

Petra a ouzomp diwar-benn an dud kentañ a zo bet o vevañ e Breizh ?

Kelc'hiad 3 – 6^{vet} klas – Orin an den



« Ar vuoc'h skedus* » (*l'auroch rayonnant*)

Sed amañ unan eus ar mein engravet bet kavet e Plougastell-Daoulaz gant skipailh Nicolas Naudinot e 2013. An oberenn-arz koshañ bet kavet e Breizh eo betek-henn. 14 000 bloaz zo e oa bet graet. (Cliché N. Naudinot, Naudinot *et al.*, 2017)

* Anv brezhonek bet dibabet gant an arkeologourien o-unan.

Barregezhioù

- En em lec'hiañ en amzer istorel.
- En em lec'hiañ er spas.
- Kompren an dielloù.
- Implijout ar binvioù niverel en un doare poellek.

Pinvidik-kenañ eo Breizh war tachenn an arkeologiezh. Taolomp ur sell war roudoù kentañ an dud bet kavet er vro da vare ar Paleolitik. Daoust peseurt doare raktud pe tud zo bet o vevañ neuze e Sant-Maloù-Fili (35), e Menez-Dregan e Plouhineg (29), e Menez-Dol (35) pe e Plougastell-Daoulaz (29) ?



Sellomp ouzh ar pennad diwar-benn ar Ragistor tennet diouzh ar film *Anavezout Breizh adalek ar penn kentañ betek bremañ*, embannet gant Skol Vreizh.

Eus ar raktud d'an dud

Meur a rumm raktud zo bet kavet roudoù anezho. Toumaï a vefe an hini koshañ. Tro 7 milion a vloavezhioù eo. War ar wezenn amañ dindan e weler mat n'int ket deuet an eil war-lerc'h egile. Un doare gwezenn eo gant skourroù disheñvel. An holl zo aet da get paneve an *homo sapiens*. Hon hendadoù eo ar re-se.

Homo habilis, an den ampart

Gallout a raent bale met ne redent ket. Fardet o doa ar binvioù mein kentañ gant bili.

Volum an empenn : eus 600 cm³ da 700 cm³.

Pelec'h e vevent : en Afrika.

Pe vare : eus - 2,5 da - 1,4 milion a vloavezhioù. Da get int aet.

Homo erectus, an den en e sav

Kavet o doa an tu d'ober gant an tan. Gouest e oant ivez da implijout mein benet en daou du. Sevel a raent lochennoù gant koad, eskern, mein ha krec'hen loened.

Volum an empenn : 1 000 cm³.

Pelec'h e vevent : en Afrika, en Europa hag en Azia.

Pe vare : eus - 1,5 milion a vloavezhioù da 300 000 kent J.-K. Da get int aet.

Aostralo-piteged

Raktud e oant, gouest da vale en o sav. Ne oant ket gouest d'ober binvioù.

Volum an empenn : war-dro 400 cm³.

Boued : delioù, loened bihan.

Pelec'h e vevent : en Afrika.

Pe vare : eus - 4,2 da - 2,5 milion a vloavezhioù. Da get int aet.

Homo Neanderthalensis pe den Neandertal

Gouest e oant d'ober muioc'h a vinvioù : begoù-saezh da skouer. Chaseourien akuit e oant. Tennañ a raent gounid eus al loened a baken : debriñ a raent ar c'hig, fardañ a raent dilhad gant ar c'hrec'hen. An eskern a veze implijet evit ober binvioù ha lochennoù. Douarañ a raent ar re varv. Er bezioù ez eus bet kavet profoù e-kichen ar c'horfoù marv : binvioù hag armoù mein pe eskern.

Volum an empenn : betek 1 600 cm³.

Boued : Kig-kezeg, kig-bizon, kig-karv.

Pelec'h e vevent : en Afrika, en Europa hag en Azia.

Pe vare : eus 330 000 da 30 000 kent J.-K. Da get int aet.


Homo sapiens, pe an den modern

Kalz binvioù disheñvel a implijent : an treant-askorn, an nadoz-askorn, begoù-saezh e kailhastr. Ijinet o doa an arzoù. Fardañ a raent bravigoù gant eskern, dent, kregin, mein pe skilfoù mammouted. Livañ a raent diabarzh ar mougevioù gant livioù aozet diwar plant, pri, traezh. Tresañ a raent loened e-giz ma weler e mougev Lascaux e departamant an Dordogne. Kregiñ a raent da vevañ diwar al labour-douar. Krog e oant da sevel tiez ha kêriadenoù.


Volum an empenn : 1 400 cm³.

Pelec'h e vevent : er bed a-bezh.

Pe vare : eus 200 000 kent J.-K. d'an amzer a-vremañ. Tro 40 000 bloaz zo int en em gavet en Europa.



Hag e Breizh ?



(Cliché N. Naudinot, croquis C. Bourdier, Naudinot *et al.*, 2017)

Mein engravet

Pelec'h : PLOUGASTELL-DAOULAZ

Pe vare : 12 000 bloaz kent J.-K.

Sed amañ an oberennoù-arz koshañ bet kavet e Breizh.



Askorn




Lavnenn

Eskern hag binvioù

Pelec'h : MENEZ-DOL (Il-ha-Gwilen)

Pe vare : tro 70 000 bloaz kent J.-K.

Eskern bet kavet : mammouted, frikorneged, kirvi...



Roudoù kentañ an tan

Pelec'h : Menez-Dregan, PLOENEG (Penn-ar-Bed)

Pe vare : tro 465 000 bloaz kent J.-K.



Maen benet

Pelec'h : SANT-MALOÛ-FILI (Il-ha-Gwilen)


Pe vare : tro 600 000 bloaz kent J.-K.



Klaskomp

1. Sellit ouzh ar filmig (p. 1) ha respontit d'ar goulennoù-mañ :
 - a) Abaoe pegeit ez eus bet tud e Breizh ?
 - b) Peseurt roudoù anezho zo bet kavet ?
 - k) Penaos e veve an dud da vare ar Paleolitik ?
 - e) Roit anv an daou brantad ragistorel a zo deuet war-lerc'h. Pe vare e oa kroget pep hini ?
2. Peseurt raktud pe tud a veve er pevar lec'h meneget er bajenn-mañ ?
3. Diwar ar pezh ho peus gwelet ha lennet er fichenn-mañ, savit ur frizenn gronologel.

An istor en-dro deomp






(dessin F. Blanchet, Naudinot *et al.*, 2017)

An arkeologourien a heuilh reolennoù resis pa reont furchadennoù. Ur c'harzennadur a savont war an dachenn da gentañ. Evel-se e c'hallont merkañ war ur plan pelec'h eo bet kavet kement artefakt* dizoloet ganto. Ur wech niverennet e c'hall bezañ tennet diouzh an dachenn ha renket. Goude-se e vo muzuliet, tennet meur a boltred anezhañ ha treset.

* Un artefakt : n'eus forzh peseurt tra bet kavet hag en deus un dalvoudegezh bennak evit an enklaskoù : bez' e c'hall bezañ ur benveg, ur maen engravet...

Sed amañ al labour a ginnigomp deoc'h. Sellit ouzh **artefaktoù** bet kavet e Menez-Dregan pe e Plougastell : mein engravet ha binvioù. Deoc'h d'ober un dresadenn skiantel eus unan anezho, diwar skouer hini ar maen engravet p. 3 pe an dresadenn amañ a-gleiz. Evit pep benveg e ranker tresañ kement tu anezhañ.



Ha furchadennoù arkeologel zo bet kaset da benn en ho kumun? Kit war al lec'hienn **Geobretagne** evit gwelet petra zo bet dizoloet evit poent. Klikit war « i » ha war ar pik e liv ho peus dibabet evit gwelet petra eo. Ma klikit war ul lec'h bennak ha war « Opérations archéologiques préventives » e c'hallot gwelet teuliad an enklaskoù. Evit al Liger-Atlantel, kit war al lec'hienn **atlas.patrimoines**.

Da lenn, da selaou, da welet, da sellet...

Meur a virdi gouestlet d'ar Ragistor zo e Breizh. Evit mare ar Paleolitik, kit da virdi Breizh e Roazhon, da hini Karnag pe da hini Penmarc'h.

Ar Ragistor – Taboulin niv. 18, 2010.

Da bellgargañ war **lec'hienn TES**.

ELÉGOËT (Louis), *Istor Breizh*, TES, 1999.

KERVELLA (Goulc'han), *Aada ha Narki*, Al Liamm, 2008.

KERVELLA (Goulc'han), *Aada ha Narki 2 – Etrezek an inizi*, Al Liamm, 2014.

KERVELLA (Goulc'han), *Ar roc'h toull livet*, Al Liamm, 2016.

MONNIER (Jean-Jacques), *Anavezout Breizh adalek ar penn kentañ betek bremañ* (DVD), Skol Vreizh, 2014.

ROSNY Henañ (J.-H.), *Brezel an tan : romant an oadvezhoù feuls*, Hor Yezh, 1996 (troet e brezhoneg gant Marsel P.J. Keraveg).

TATIBOUËT (Yann), *Istor Breizh kontet d'ar vugale – 1. Ar Ragistor*, Beluga, 2015.




Mirdi Breizh e Roazhon

Artefaktoù bet kavet e Plougastell pe e Menez-Dregan

Cliché N. Naudinot, Naudinot et al., 2017



Cliché N. Naudinot, Naudinot et al., 2017



Photos et DAO : A.-L. Ravon